

CHANSON

AR

SEIZ SQIENT NATUREL



Voar eun ton agreabl.

Apollon, Mercurius, Venus ha Jupiter,
 C'hui a decl'h voar an douar an amitie sincer,
 Hac a ra d'an dud yaouanq en em garet parfet,
 Prestet din hoc'h assistanç, me o ped, eur momet.

Sperejo celestiel, astro ar firmamant,
 Me a deu doc'h implori, gant eur galon ardant,
 Da rei din an talanchou a bere m'eus ezon,
 D'espliquan ar propojo arretet em c'halon.

Abostoiet evurus, hanvet an Ebestel,
 C'hui a ro instruction d'ar gristenien fidel,
 Pa'noc'h choaset gant Doue 'vit prezeg ar lezen,
 Chilaouet he grouadur, exaucet va feden.

Rouanez an amitie, princes ar yaouanquis,
 Moïses ha Jeremi, chefo deus an Ilis,
 Ha c'houi, carante dener, zourcen an deliço,
 Deus a gomso eloquant remplisset ma gueno.

Ne c'houlenan qet antren 'bars en theologi,
 Na mont da guemer affer ous an dud a studi;
 Ar belec, an arc'hescop hac an den a bluen,
 Ne garfen quet'no enor divanquan an asen.

Ho propojo ravissant a blij d'in, ma mestres,
Ha rejouiss ma c'halon, ma noc'h ket traitoures,
C'houlennan netra dianac'h, qu'en evit ho quittât,
Evit ar veaj quentan, 'met bean 'n ho craç vad.

Arsa 'ta, ma servijer, couls eo dimp finissan,
Me a deu da laret dac'h qen a vo ar c'hentan,
Ous ho pidi da retorn hep dale d'am guelet,
Ma graç mad a vo guanac'h partout lec'h mac'h efet.

'Vit an eil guez'h, a gredan. me o vont da vale.
Gant eur speret qen content 'vel hini an æle,
Da velet ma mestres coant, rouancs ma c'halon.
Hini'n deus ma remplisset a gonsolation.

Bonjour ha joa, ma mestres, rouanes ar fleurio
A guement so bet biscoas plantet ebars er vro.
Brillantoc'h evit an heaul, scleroc'h evit al loar,
Puissantan mere'h yaouanq a so voar an douar.

Me a garje bean bet eloquanç Ciceron,
Pe autraman ar furnes en defoa Salomon,
Eur guenau gret en arc'hant hag un teaud alaouret,
Da barlant en ho presanç evel ma veritet.

Pa'zoc'h deut beteg aman dre garante barfet,
Me a rent dac'h ar salud gant enor ar respet ;
'Mije gouvet er feçon hag an tu da barlant,
A vije ma brassan joa plijout d'ho santimant.

Mes me so eur plac'h yaouanq 'neus speret dister,
N'en on qet bet studiet 'veldoc'h, mo servijer ;
C'houi a voar scrivan ha len ha me n'hen ouzo
N'allan qet coms eveldoc'h, rac se ma excuset.

Ma mestres, c'houi so furoc'h evit ar Salomon ;
Ma vije permetet d'in digor dac'h ma c'halon,
C'houi'n ije guelet enni gravet an amitie,
Hini am eus evidoc'h gant guir humilite.

Ma qeret a vemp on daou unisset assembles
Evel ma oa sant Joseph hag hon Mam ar Verc'hes.
Mar-g-allan ho possedi eun de var an douar,
Me a vezo quen joaüs 'vel an æle er gloar.

Me a so eur femelem dister a galite,
N'on qet ingal'n ho quever en mado, en ligne ;
Mes mar-g-eo predestinet gant Doue eternel,
A vemp hon daou unisset, ne c'houlenan qet voel.

C'houi eo fleuren ar merc'hed a gement so'r c'hanton ;
Chilaouet, mar plij guenac'h, me ho ped a galon,
Moes an hini disteran deus ho sevijerien,
A c'houlen eur mouchouer pe eun dabatieren.

Evit merq a amitie, ma servijer fidel,
Ez an da glasq an alc'hoec da dierin armel ;
Hag a vije ma c'halon ho pije goulennet,
Ma vije possubl en rei'm oa qet ho refuset.

Tostaet aman, me ho ped, breman ma servijer ;
Cetu aman var an dol pevarzec mouchouer,
Ha peder dabatieren olifant zulaouret ;
A choas a so evidoc'h, hag ouspen, ma qeret.

Me ielo breman d'ar guer gant eur galon contant,
Pa'meus guelet, ma mestres ho carante ardant,
Ha ma parlajet ganin lot deus hoc'h amitie,
Me a respeto anoc'h en durant ma bue.

Qen vo'ta, cloarec yaouanq, ha ma brasant mignon,
Hoc'h aviso eloquant a raviss ma c'halon ;
Deus a gement den yaouanq'n eus ma darempredret,
N'em eus caret nemedoc'h boe m'oc'h deut dam guelet.

Ma mestres so'r plac'h yaouanq hag e deus blev melen
Ha daoulagad qen ardant evel div stereden ;
Hannes en deus ar paour, gaot he selo mignon,
Da rei d'he muan caret ar recreation.

Salut doe'h, ma mestres coant, gant honor ha respect,
Me so deut beteg ho ti gant eur galon parfet,
Evel ma oa gotejal ar profet Daniel
Bete dor ar barados da barlant ous an zel :

Dre gommandamant Doue evit goulen ar c'hraç
Da vevan en he repos ebars un ermitaj.
Mes, allas ! me so un den a so bas a speret,
N'on qet eapabl da barlant evel ar profedet.

Me ho ped, ma servijer, cessel ho compliment,
Ho tiscourio admirabl hag ho comso charmant ;
Rac ouspen se an alc'houe var ma oll secrejo,
Pa neverd hoc'h ajistanç me'm moa disesperet.

Me a lar d'ac'h, ma mestres, leun a gonfusion,
C'houi 'moa laqet porcheres var doul dor ma chalon,
Hac ouspen se an alc'houe var ma oll secrejo,
Ne garan hini 'merdoc'h a guement so er vro.

N'oufac'h biqen, ma mignon, me a lar dac'h aman,
Caroud anon, a-dra-sur, mouc'h 'vit n'ho caran ;
Couscoude gant ma c'herent me a so difennet,
Dro ma eo bet ar goad derad o preseq'n hoc'h enep.

Quelo trist ha effroyabl, grevus, direson,
Te a blant c'hleve noas 'bars en creis ma c'halon ;
Eur vatimant am oa gret hag a so dispennet ;
Birviqen var an douar ne repos ma speret !

O Majeste infinit, ma Doue, ma C'hrouer,
Diganac'h a c'houlenan ar c'hras particulier !
An ners hag ar puissanç rojac'h d'an intanvez
Da distrujan gant he dorn roue Holophernes.

C'hoas a c'houlenan ouspen, qis un den a verit
Oll dalancho ar profet hag ar roue David,
'Vel m'en defoa gret goejal, quent disqen d'ar blenen,
An empereur Bonapart hag he officerien.

M'amie bet ar pouar hag ive ar buissañ.
Evel 'n defoa sant-Louis, pa oa roue en Franç,
D'exilan ar goañ deaudo deuz ar rouantelez,
Em ije gret anter deus ma silvidigez.

Lennet ar scritur santel, me ho ped, ma mestres,
Hag a caffet rapportet, var levr ar furnes,
An neb a gret goañ deaudo, so diavis ha foll ;
N'eman qet var en douar an hini blij d'an oll.

Maleurus eo an ini so var an douar ;
Mar deu dean nep feçon da goean 'n fouar ;
Ha, siouas ! qasi an oll, abret pe divezat,
En peb amzer eo stignet ar pecho miserab.

Ar pab en he gathedral, ar roue var e dron,
An avocat 'ne studi, ar beleg o sarmon,
Hag ar barner aseet quichen he dribunal,
So sujet d'ar goañ deaudo quencouis 'vel ar re all.

Breman gredan parfet ar pes-am eus lennet
En eul levr ancien gret gant ar brofedet,
Eo qen difficil beva divlam var an douar
'Vel mont da fong ar mor bras a retorn var ar bar.

Pa dei messenger Doue da draouïen Josaphat,
Da separi ar re fall deus a vesq ar re vad,
Yo guelet ar guel deaudo dirac an assemble
O vont da dan an ifern 'vid eun eternite.

Evit dere'hel ar sermant am oa gret, ma mestres,
Divezan 'm oam zet 'n enor da barlant assembles,
Ez on deut d'ho saludi gant guir fidelite,
Mes ne c'houlenan netra enep d'ho bolonte.

Arretet ho propoje breman, ma c'hamarad,
Lampâd a ra ma c'halon, birvi a ra ma goad,
Hag evit approuvi d'ac'h m'amitie 'noc'h andret,
Ma qeret ez int ganac'h el lec'h ma tizirfet.

Gret reflexion var se, me ho ped, ma mestres,
Ma 'm be ho casset ganin en qis eun esclaves,
Ha donet d'hoc'h eureuji hep conje ho ligne ;
Se a ve reprochap d'in en durant ma bue.

Mes confortet ho calon, marteze gant amzer
A dremeno ho fulor ha teri o c'holer :
Hag a veomp unisset gant o c'honsentamant,
He c'halon oa qer mantret qen n'alle qet parlant !

Malheur 'vit an den yaouanq ne lezer anean
Da dimezi p'en deus c'hoant d'an hini blij dean !
Distrempet oa an douar eno gant hon dæro
Qen a boullade an dour da gargan ho boto !

Me a deu d'ho supplan, tud yaouanq ar c'hontre
D'unissan ho c'halono assembles gant hon re,
Me 'n efoa eud ha glac'har o quitât ma mestres ;
Qeit ma vin var an douar n'he ancoain james.

Mes Doue a lavar dimp ebars ar scritur saer :
Troc'han an refet ho torn ha tennan ho lagad ;
Gueloc'h eo mont gant eun dorn d'ar jaoio evurus,
Evit n'en deo mont gant daou d'ar flammou malurus.

He zad a lavaras d'in ; setu aman'l lizer,
Pehini'm eus bet reevet digant eur messenger,
Hag em eus commission d rei anean d'ac'h ;
Laqet-an en ho codel ha qasset-an genac'h.

Sclerijen an oll astro, te so hanvet al loar,
Disqen ebars em c'halon ha disec'h ma glac'har,
Mar permet ma daoulagad arreti ma daero
Da rapporti eur guentel enep ar goel deaudo.

Te'n efoa roet av's, teaud brutal ha funest,
D'hon tad ha d'hon mam qentan er barados terrest,
Da dibri demeus ar freus difennet gant Doue :
Se so qirree d'hon miser ha d'hon oll baourante.

Bars en prison Pharaon te en defoa plantet
Joseph, ar santellan den deus ar patriarchet,
Pa oa bet faos accuset gant pried Putiphar ;
'Boe ma eo crouet ar bed ec'houd voar an douar.

Te atlag an dud yaouanq memes voar ho enor
Gand eur voues qen eclatant a ia beteg ar mor,
A deu da lemel diante un tensor excellent,
Preciussoc'h 'vit an aour hag evit an arch'hant.

Abalamour d'he ligne ec'h espergni Judas,
Hag avanç 'bars en histoar beteg Hérodias,
Pinin gonsellas e merc'h dre un avis traitour,
Da d'houlén var un assiet pen sant Ian-Vadezour.

Lar din, teaud miliguet, ma n'en oud qet contant
Bean guerzet Mab Doue ha dibennet eur sant ;
P'ach oud en'pad an amser o clasq dont da laqad
Ar mein-be var an douar da ruan gant ar goad.

Ne bad pelloc'h ma c'halon da brezeg varnean
P'ardon a misericord a c'houlennan 'vitan,
M'en defo eun ha glac har dimeus he pec'hejo
Ha m'an em convertisso bete fin he zeio.

P'antreis em c'habinet gant desolation
En sell da gavet un dra a gonsolation ;
Ac'h is da len a lizer am boa bet diant he zad,
Pa digoris anean, m'en defoa calonat.

Ma c'halon so glac'haret, ma Doue, pa sonjan
Bet on welet ma mestres 'vit ar veoc'h divezan ;
Roët eo din m' c'honjet scrivet var baper goen,
Ma c'houtanq en general d'he dilezel a gren.

Me oa tri de a tear noz hep dibri nag evan
Na qen nebeut hep repos : na rent nemet goëlan,
Dre ma renqen separi, hep bean meritet,
Deus fidelan merc'h yaouanq anavan var ar bed.

An drier de a scrivas qelo d'he c'hamarad,
Ha me res dezi respont divar lizer he zad :
Promoncet oe an arret enep d'ho servijer,
C'houi iel breman d'ar gouent ha me chomo er guer.

Pa oan 'bars ma studi o lenn ma levrio,
Ma welet quasi man quiet, beuet gant an daëro,
E renquis ho dilezel ha mout da pazeal ;
Ha me quemer ma fusuil 'vit mont da chasseal.

Arri 'bars en creis ar c'hoat me oa fatig bras,
Ha me da guemer repos eno var ar yeot glas,
Hag evel eur Madalen commañç da deplori ;
Ne oa med Doue epqen capabl d'am c'honsoli.

En creis ma brassan glac'har o sonjal em mestres,
Qasi 'vel dre eur miracl a velis eun heies
En em stringas d'am daoulin evit ma saludi
Inspiret a beurs Doue da dont d'am c'honsoli.

Me ho ped, galant yaouanq, arretet ho taëro
Ha laqet ho confians en Crouer an envo :
Doue a neus ar pouar da gonsoli an oll ;
Da neb a fio ennan n'an ei james da goll.

C'houi a so var an douar 'bars en displijadur,
Noc'h eus defot a netra mar queret bean fur,
Ha me a so vevan ebars ar foreso,
Hag a gemer plijadur da usan ma deio.

Eno e colis memoar deus ma mestres fidel,
Ha credi n'oamp qet choaset gant Doue eternal
'Vit bean var an douar assembles unisset ;
Graç dimp da vean eun da enn pales an Drindet.

Neuze retornis d'ar guer 'vel pa'm ije nijet,
Toman re ma goad ouzin, ne santen qet qerzet ,
Ma speret a oa qen scanv, ma c'halon qen joaüs
Evel ma c'heo bars an env an æle evurus.

Mar boe goejall ma c'halon carguet a disesper,
Breman me zo quen ezet evel eun ec'houeder.
Hini ia beteg an env ha reorri d'an douar ;
Adieu laran d'an dourmant, achu eo ma glac'har.

Madelez oll-buissant, Roue ann oll æle,
Me rent dac'h presentamant graçou a drugare,
P'oc'h eus roet din ar c'hras, Roue ar firmamant,
Da finissan ma chanson joaüs ha triumphant.

Homan so eur son neve rimet ha composet,
Gant eur scrivagner yaouanq dimeus a Lanrodec,
So ganet ebars er bloa mil eis cant hag uguant,
De diaroc guel ar Verc'hes a ve 'bars en Avant.

Ha 'vid espliquan he noad d'an oll dud ignorant
Tri mis ha pevar ugent en tu all da daou c'hant ;
Ebars en canton Plouagat eo ganet ha maguet.
Hag he hano scrivet mad so GILLES MORDELET.

Mar'm eus drouc-laret netra gant ma fragilite,
C'houlennan escus ous an dud ha pardon ous Doue,
Hag ouspen a tesiran da guemend he c'hlevo
Ar boneur da jouissan deus ar c'hloar an envo.

FIN.

